



Photo CHARROUIN, St-Pol-de-Léon

Paroles et magie

Na Zimezit ket d'an Arc'hant

SON NEVEZ

1

Dirag an oll dud a zo ama
D'eoc'h me zo o vont da gana
Eur zon hag a zo ar wirionez
Great diwar-benn ar vriadelez.

2

Gwechall p'en em garet gant joa
E vezet lezet da fortunia
Siouaz ! breman ez euz chencharmant
E ranker kaout eur mareas arc'hant.

3

Beza zeuz kals, tadou ha mammou,
Pa vez en ho zi ar goulennou,
Arack ma roont ho c'hoiziantamant
War an daol e rank beza arc'hant.

4

Kalz yaouankizou zo barz ar vro
Zimezont ket da re blij dezho,
N'hellont ket ober ho bolontez
Abalamour n'o deuz ket danvez.

5

Goulskoude peuz klevet lavaret
N'eo ket madou ra an eürusted,
Kalz a zimez balamour d'an arc'hant
Da c'houde n'o deuz nemet tourmant.

6

Na ped dija a zo bet gwelet
Prount goude ma vezent eureujet
O vont kuit an eil diouz egile,
Echu etrezo an amitie.

7

Kalz ne lezont ket ho bugale
Da zimezi gant ho bolonte
Goulskoude ho unan poent zo bet
Ioa kountant braz da veza lezet.

8

Eun den yaouank hag a vez bemdez
Laborat vit gounit he zervez
Gant ma vo fur hag en honeste
Taloud ra kredabl merc'h eur Bourc'hiz.

9

Pa vez an heol laouen ha seder
E kreiz an deiz e skuilh he domder,
D'ar pinvidik evel d'ar beorien
D'an oll dud e ro he sklerijen.

10

En amzer goz gwechall hon tadou,
Ne reent ket kemant a ardou,
P'o deze tud o klask fortunia
Ne zellent ket euz ar peadra.

11

Dimezit m'ar deo ho polontez,
Bezit euruz epad ar vuez,
Doue skuilho varnoc'h sklerijen
A kit d'ober tan gant ho raden.

12

Sellit ket euz tensoriou ar bed,
Rak ganthro kalz a zo bet kollet ;
Atao peuz klevet ar garantez
Zo kaeroc'h eget aour ha perlez.

13

Tad ha mamm lezit ho pugale
Ma plijont mad an eil d'egile
Da zimezi, na p'o dezo c'hoant,
Ha ne zellit ket ouz an arc'hant.

FRANCIS MOAL.

(Reproduction interdite)